

YF_0047_An amzer gwechal hag an amzer breman

Ar bed oll eme Yann Goz a gemer eur stumm fall
N'eus chomet war an douar, mann evel ma oa gwechal
Paour kaez Yann c'hwi a zo chenchet dre m'oh deuet da c'hrizan
Med ar bed a zo chomet memez tra, memez tra

Goude al loar, ar stered hag an denvalijenn
Gand an heol bep mintin e par ar sklerijenn
E-barz an oabl an alc'houeder a zav en eur ganan
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

Gand e jupenn erh skornet pa deu ar goanv kriz
Da hourdan on pizied ha da ruzan hor fri
An eil dimeuz egile daou bried a dostan
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

P'erru an nevez-amzer da gaeraad ar parkou
Da lakaad bleunv er balan, deliou e-barz ar hoadou
Lakaad ar merc'hed yaouank ivez a sederan
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

Ar vugale a zo breman begeg, vif ha seder
War meur a dra int savant a-raog gouzoud o 'fater
An avalou afuret a blij dezo ar muian
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

En desped d'ar veleien, d'an diaoul ha d'e gerniou
An dud yaouank a zo troet terrupl gand an dansou
Gwell a ve ganto tremen hep debrin hag evan
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

Meur a seurez a vez lakaet da zougen ar Werc'hez
He-deus gwelet an deliou a-enep aliez
Se ne vir ket diouti modest braz da ruzian
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

An diaoul a gollas Eva bepred a zo tentuz
Ar merc'hed koant a zo ivez atao bresk ha sentuz
Dimeuz ar frouez difennet kalz siwaz a glanva
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

Bezan a zo e oll keriou kalz a goz rampenned
O-deus roet da Zoue pezh a zisplij d'ar bed
Noz-deiz o zeod milliget a ifam o nesan
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

Meur a ostiz hep burzud a jench an dour en gwin
Meur a blac'h a lak pilhou da rontaad he feultrin
Broziou d'ober eun talier, an oll a glask tromplan
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

Ar pitou kaez a zo barnet bepred da souffr poaniou
Gand ar Wawaon vez flemmet brevet a vazadou
Mar chans dezan dimezin eo dogan peurvuian
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

Meur a zogan a ra goap deuz penn e amezeg
Ha ne oar ket aliez eo c'hoaz muioh korneg
Darn all n'int ket er vreuriezh hag a garfe bezan
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra

Sepet ar bragou toull gwiz, al loerou marellet
Ar jiletenn kof yodeg, ar berukenn poultret
Ar peurrest a zo chomet e-barz ar stad ma oa
Evel en amzer tremenet, memez tra memez tra